

# FANTIK, CHOMIT EN HO PRO

An drask hag an estig a gân hag a ziskân,  
Leun é ar prajeier a vokedou-aman,  
Deut é 'n neve-amzer da heul ar gwilmiked (1) (pe gwenilied) :  
C'hwi, Fantik, a ya kwit, diouz am euz-me klevel !

Boemet ma 'z oc'h pell-zo dre zonz ar c'heriou braz,  
Na blij mui d'oc'h ho loch toet gant bannal glaz :  
Savet 'zo en ho penn dilezel ho proïz,  
Evit mont da Naoned, marteze da Bariz !

Breiz a zo, laret-hu, eur vro a baourante :  
Bevanz hi 'deuz alkent da rei d'he bugale ;  
Gwell é krampoez, youd kerc'h e ti ho mamm, ho tad,  
Eged n'è bara gwenn ouz tól eun divroad.

Baleit, mar kerit, tre da henn all ar hed,  
Bro par da Vreiz-Izel e neb lec'h na gaff-t :  
Kaer é dre he c'hoajou, kaer dre he gouriz-môr,  
Mez na kaer é dreist-holl dre he feiz, hec'h honor !

Gounidou a g'askit, plijadur, jolori ?...  
Na zey d'ho tiarben 'med poan ha melkoni :  
Danvez hag evrusted a luc'h dirak ho sell ;  
Mar dint tost d'ho lagad, euz ho torn emaint pell.

Pa viet hoc'h-eunik e Naoned pe Bariz,  
Na hirassuz e vo, na trist ho yaouankiz !  
Allaz ! pell euz ar vro emoc'h enni karet,  
Kenavo pep dudi, kenavo joausted !

Ne zaremprefet mui ar pardonioù santel,  
A remp-ni, 'pad an hanv, da zent koz pep kartel  
N'efet mui, fichet drant, antronoz ar gouelioù,  
D'ar fest war ar leur-ger ouz son skiltr ar biniou.

N'efet ket da zougen skeuden aour ar Werc'hez,  
Laouen ha glan ho tâl, c'hwi koant 'vel an Elez,  
Na da glask briaou bleun-burlu ha spèrn-gwen,  
D'ober garlanteziou da lakât war he fenn.

N'efet ken da lusa, da ziraniz kraon kelve,  
Gant ho mignonezed er zuliou d'abarde :  
Na zeder e vizec'h, o vont dre ar c'hoajou,  
Divizou kaer genoc'h, c'hoarzerez ha zoniou !

Du-ze ne welec'h mui nemet eur bobl tud yen,  
'Ray goap euz ho prezeg pe fae war ho kreden ;  
Du-ze ho proz vordet koulz hak ho chobelin,  
Pa dremenfet a-biou, lako 'n holl da c'hoarzin.

A vremen, paourezik, nec'h hag anken bemde,  
A vuntro ho kalon, a drenko ho pue ;  
Daelou stank a vremen a dano ho lagad,  
Ha den d'ho kennerza, nikun d'ho laouenât.

Ah ! kredit d'in, plac'hik, gwell é ho lochik kloz,  
E lec'h m'ho peuz bevet ken dijâl de ha noz ;  
Gwell é al lanneier, gwell é ar stankou kled,  
E lec'h e kanec'h gae, o vesat an denved !

Rozen diliorzet a weler o c'hoenvi,  
Pep avel, pep douar n'int ket graet eviti :  
Nag evidoc'h, koantik, n'e ket mad, n'e ket fur,  
Dilezel ho mam-vro ha redek en aontur.

Er vro 'lec'h omp ganet eno 'ma kaer beva :  
E riboul ar c'heriou n'ez euz na peuc'h na joa ;  
N'euz met gloaz 'vit ar c'horf, stlabe 'vit an ine :  
Ped a goll o yec'hed hag o lod euz an îê !...

Er vro e veer laket gant Doue da c'henel,  
Eno 've mad beva, eno ve mad mervel :  
Sonjet c'hoaz ouspen-ze : Pa varvomp e ve gwell,  
Hoc'h be, tost, er vered, d'al lec'h 'oe hon c'havell.

Kerent ha kenvroïz, nemet gant ar re-ze,  
N'hon do eur beden vad 'vit hon paour kez ine ;  
Hon relegou ive na oufent kousket ez,  
Mar ne dint en disheol a iliz hon parez !

Chomit, Fantik, chomit en ho pro Breiz Izel,  
Foei 'vit ar c'heriou braz, foei 'vit ar broiou pell !  
Pelec'h e kavfet-huevrusted, karante,  
Nemet er vro 'zo gret evidoc'h gant Doue ?

*Une chanson de M. R. (sect. de Fey. S. com.)*



